

8N2-3-087
Ploumilliau

Gwerz koz Sant Millio



Gwerz koz Sant Millio



GWERZ KOZ

EN ENOR

DA ZANT MILLIO

Roue Breiz ha paeron parouz Plouillo



Kanomp 'kevret, gant karante,
Eur werz bet savet a-neve
Evit enori Sant Millio,
Paeron a barouz Plouillo.

Spered-Glan, ni 'deu d'ho pedi,
Ha c'houi ive, Gwerc'hez Vari,
Reit d'imp sklerijenn da ziskouez
Ar zantelez eus e vuez.

Sant Millio, ganimp enoret,
En Breiz-lzel a oe ganet,
War-dro ar blavez seiz-kantved,
Goude maro Zalver ar bed.

✧ Sant Millio a oa ginidik
A ouen uhel ha pinvidik ;
E dad Budik a oa roue
D'ar Vretoned en amzer-ze.

✧ Budik an devoa daou vogel,
En o bue gwall-dishenvel ;
Millio santel, karantezus,
Rivod fallakr, kri ha lorc'hus.

✧ Pa oa Millio erru en oad,
E oe roue war-lerc'h e dad,
Kouls abalamour d'e furnez,
D'e skiant-vad ha d'e zantelez.

✧ Kemer a eure da bried
Eur verc'h zantel ha fur meurbed,
Eus ar wrienn an uhela,
Hanvet ar brinsez Aurilla.

Entre ma chomaz er bed-man
An daou bried fur a-unan,
Doue 'roaz d'ê 'vid e c'hloar
Eur bugel santel, sant Melar.

Tad ha mamm Melar a veve
O-daou en karante Doue ;
Bemde e kreskent en graso,
En santelez, en vertuio.

✧ Millio 'oe seiz vla war an trôn,
Leun a fe, izel a galon ;
Dre e skouerio mad e touge
An holl da heuilh lezenn Doue.

Evel galloud ar rouane
A deu d'eze a-berz an Ne,
Ren a eure ar Vretoned
Gant karante ha lealded.

Kastian 're an torfejo,
Ha goprât ar mad-obero ;
Ober a re, gand damani,
Renta e wir da bep-hini.

Hen oa tad an emzivadad,
Difennour an intanvezed ;
Ouz ar bevien 'oa truezus
Dre ma 'z int mempro da Jezus.

E garante oa aketus
Da renta e bobl evurus,
Hag an holl a veule Doue
Ma oa ken santel ar roue.

x An noblantz hag an holl brinsed
Ouz Millio oa doujus meurbed,
Karet e oa gand an holl bobl
Nemet gand ar judaz Rivod.

Rivod oa eun den gwall-zius,
Leun a lorc'h, ha gwarizius ;
Poan a re d'ean 'n e galon
Gwelet-sant-Millio-war an tron.

En gwirione, bevan a re
Hep fe hag hep doujanz-Doue ;
Noz ha de na huvree ken
'Met enoriou ha kurunen.

x N'halle kaout ar rouantelez
Nemet dre wall-drubarderez,
O skuilhan, didrue, ar gwad
Eus e vreur ken fur ha ken mad.

Piou-bennag a zo goneet
E galon gand an drouk-speret,
Na deu ket buhan da gilan
Rag ar pec'hed an euzusan.

Rivod, e galon peur-droët
Gand an diaoul ouz an torfed,
A bign d'ar gambr 'lec'h oa e vreur,
En zell d'hen lac'han war an eur.

Dre zindan ac'h a ar Judaz :
« Sed aman eun dra a bouez-vraz !
Deut, 'mean, me hen displego,
En eur vale ni a gomzo. »

Pa oant aet o-daou a goste
E lec'h ne oa den nemet,
Rivod neuze, gand e zabren,
A droc'h d'e vreur santel e benn.

Setu penoz e oe lac'het
Millio gand e vreur milliget ;
Ar vertu a ve peurvuian
Gwall-gaset gand an dud-fallan.

Pa oe klevet eur seurt kelou,
Ne oe dre-holl nemet kanvou ;
Braz ha bihan e oe rannet
O c'halono dre an torfet.

An eil a lavar d'egile :
Maro eo Millio hon roue,
Maro ar zant, maro hon zad,
D'imp-ni holl pebez kalonad !

Rivod na gavaz ket d'ean
'Oa trawarc'h gand an torfed-man,
Rag ar bec'herien kaledet,
'Lec'h-paouez, a-wasâ-bepred.

Kavout a reaz tud diroll
'Vid ober evitan an töl ;
Int-i a lazaz en Lammeur
E niz paour, mab pennher e vreur.

Sant Millio hag e vab Melar
A zo o-daou o ren er c'hloar ;
Ha Doue, dre o fedenno,
An deuz graet kalz a vurzüdo.

An istor ha Bue ar Zent
A verk hag a ro da intent
E oe Sant Millio sebeliet
En iliz-veur ar c'hoz Yeodet.

Parousianiz a Blouillo,
Bezef deol da zant Millio :
C'houi eo e bobl muian karet,
Enoret-han hag hen meulet.

Pet sonj e touget e hano,
Pet song ez oc'h tud sant Millio,
Diwalet mad en nep doare,
Da zizenori an tad-ze !



KANAOUEN NEVE

EN ENOR

DA ZANT MELAR

Mab da zant Millio ha merzer evel e dad.

~~~~~

WAR DON : *An tolennoù.*

Otro Doue madelezuz,  
A zelv ar bed dre dorn Jezuz,  
C'houi a gurun ar verzerien,  
Gand ar skedusa kurunen.

Dreinded santel, oh ! ni ho ped,  
Gret, evel gwech-all d'ar profed,  
Gret d'hon c'halon en em domma,  
Ha d'hen c'homzou en em dana.

— 11 —

Ni 'garfe meuli sant Melar,  
A zo breman savet er c'hloar,  
A zo breman dreist ar stered,  
Evurus e ti an Dreinded.

Ganet 'kreiz ar binvidigez,  
E-barz palez ar rouanez,  
Enor, plijadur nag arc'hant,  
Ne oe treac'h d'eur galon ken glan.

E galon ken glan ha lili,  
D'an Nenv, yaouank, a re avi ;  
Evel eur goulm e oa dinoaz,  
Furoc'h bugel ne oe biskoaz.

An noblanz eus eun ine glan  
Eo kaera noblanz a welan ;  
Bleunien lugernuz ar furnez,  
C'houi dal mui eget aour, perlez.

Kaeran burzud a oe gwelet,  
Pa oe bet Melar mac'hagnet,  
Gand eun dorn arc'hant 'labouraz,  
Gand eun troad arem e kerzaz.

Sklerder an Nenv 'deu da bara  
En-dro da gorf ar merzer-ma,  
E-pad mac'h a kwit e ine,  
Diwar ar bed, war-zu Doue.

War e bedenn, penn ar merzer,  
A doraz sec'hed e vuntrer :  
Toret ive, er c'halonou,  
Sec'hed diroll ar gwall-zïou.

Eur plac'h outan 'n em erbedet,  
A viraz divlam he gwerc'hded,  
Hag e oe skoet an den fall  
Gand eun tol dibare rak-tal.

Eun devez, en eur dol eur men,  
'Refoc'h sevel eun eienen :  
Melar, bet ive 'vid hon bro,  
Eur vammen eus an holl c'hraso.

---

IMPRIMATUR :

*Brioci, die 4<sup>e</sup> julii 1898.*

M. LE PROVOST, *v. g.*

*Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guillaume*